



Kenurzhiezh Sevenadurel Kevredigezhioù Breizh  
Parmenerie des Souétes Qhulturales de Bretègn  
Coordination Culturelle Associative de Bretagne

6 plasenn Gwirioù Mab-Den | place des Droits de l'Homme – Ti ar Vro – 29270 KARAEZ-PLOUGËR | CARHAIX-PLOUGUER  
SIRET 519740088 00025 • (+33) 02.98.73.20.58 • kevrebreizh@kevrebreizh.bzh  
www.kevrebreizh.bzh • www.twitter.com/KevreBreizh • www.facebook.com/kevrebreizh

## **KEMENNADENN – 26 A VIZ MAE 2020**

### **COVID-19 : un digarez evit nuliñ gwir ar Vretoned d'ar brezhoneg ?**

#### **Un danevell evit Kuzul Europa a-berzh Kevre Breizh**

Goulennet eo bet digant ar stadoù gant Poellgor arbennigourien Karta yezhoù rannvro ha bihanniver Kuzul Europa teurel evezh evit ma ne vefe ket lezet a-gostez komzerien ar yezhoù-mañ en divizoù kemeret a-benn stourm a-enep ar c'hleñved-red. Lakaat a ra war wel ez eo o implij un dra ret evit mad ar re a ra gante, da bere ne ket dleet bezañ lakaet dindan diforc'hidigezh e pep keñver, er mediaoù, en deskadurezh hag er vuhez foran peurgetket.

Setu perak eo bet kaset un danevell gant Kevre Breizh, kenurzhiezh sevenadurel kevredigezhioù Breizh, da Kuzul Europa, a zo e garg difenn an demokratelezh, gwirioù Mab-Den hag ar Stad a wir, an danevell-se diwar an diforc'hidigezh gouzañvet gant ar vrezhonegerien, peurgetket goude ma oa bet lamet kuit an holl abadennoù brezhonek e radio ha skinwel ar servij publik, ha klozet d'ar gwellañ holl er rouedadoù sokial hag er Genrouedad en desped da youl ar gazetennerien hag ar vuhezourien vrezhonek o unan. Lakaat a ra Kevre Breizh war wel ivez ez eus un diouer a zafar pedagogel enlinenn ha diaesterioù kreñvaet evit ar c'helenn divyezhek, en desped d'al labour youlek kaset da benn gant ar gelennerien publik ha d'ar benviji lakaet e plas gant ar rouedad dre soubidigezh Diwan.

Dont a ra an diaesterioù ouzhpenn-mañ en un arroud ma'z eo bet kaset da fall stad hor yezh gant politikerezh ministrerezh an Deskadurezh stad. Dispriz a zo bet lakaet gantañ endeo war ar yezhoù rannvro da geñver adreizhadur al lise hag ar vachelouriezh, evit gounid yezhoù an Henamzer, er c'hontrel eus ar pezh a vez lavaret gant Jean-Michel Blanquer. Ar pezh a zo gwiriet gant an digresk a weler war niver ar skolidi o choaz ar c'helennadurezh dre zibab.

#### **Evit ur gevredigezh demokratel o toujañ da wirioù diazez Mab-Den**

Evel un arouez eus an dinac'h da anavezout liested ar sevenadurioù hag ar yezhoù eo savet prokulour ar Republik Sant Brieg, e-pad miz Ebrel e-kreiz ar c'hlozadur, a-enep degemer an « ñ » en anv ur c'hrouedur bet ganet e Pabu (22) hag a oa bet graet Fañch anezhañ, pa oa bet lakaet an anv-se e kaier ar bev gant an aotrou maer, o toujañ da yezh ha da wirioù tud ar c'hrouedur.

Diwar neuze, ha savet gant ar muiañ a-enep d'ur galloud a-blom da geñver an enkadenn yec'hed-mañ, ul lizher d'an 20 a viz Ebrel a-berzh Rektor an akademiezh a adaoz stignad an tañva d'ar brezhoneg kaset da benn gant gopridi kevredigezhioù e skolioù kentañ derez Penn-ar-Bed, kement-se anez kemer kuzul digant e gevelerien, anezhe an Departamant, ar c'humunioù ha Kuzul Rannvro Breizh.

Ne c'heller ket gouzañv doareoù aotrou a-gozh ha dispriz ar seurt-se ouzh dilennidi ar bobl en ur gevredigezh demokratel gant keodedourien frank, anaoudek hag atebek. En-gortoz emañ Kevre Breizh eus ur gwir guzuliadeg evit gwir ar yaouankiz vrezhonek da yezhoù ha sevenadurioù he bro e-pad ar 21añ kantved, diouzh heñchadurioù an UNESCO evit difenn liested ar sevenadurioù, ken a-bouez hag ar vevlied, hag evit doujañ da wirioù diazez Mab-Den.



Kenurzhiezh Sevenadurel Kevredigezhioù Breizh  
Parmerie des Souètes Qhulturales de Bertègn  
Coordination Culturelle Associative de Bretagne

6 plasenn Gwirioù Mab-Den | place des Droits de l'Homme – Ti ar Vro – 29270 KARAEZ-PLOUGËR | CARHAIX-PLOUGUER  
SIRET 519740088 00025 • (+33) 02.98.73.20.58 • kevrebreizh@kevrebreizh.bzh  
www.kevrebreizh.bzh • www.twitter.com/KevreBreizh • www.facebook.com/kevrebreizh

## COMMUNIQUÉ – 26 MAI 2020

### COVID-19 : prétexte pour supprimer le droit des Bretons à la langue bretonne ?

#### Un rapport de Kevre Breizh au Conseil de l'Europe

Le Comité des experts de la Charte des langues régionales ou minoritaires du Conseil de l'Europe a appelé les États à la vigilance pour que les locuteurs de ces langues ne soient pas les oubliés des mesures prises pour lutter contre la pandémie. Il souligne que leur usage est nécessaire au bien-être de leurs locuteurs qui ne doivent pas subir de discrimination à cet égard notamment dans les médias, dans l'enseignement et dans la vie publique.

C'est pourquoi Kevre Breizh, coordination des associations culturelles de Bretagne, a adressé un rapport au Conseil de l'Europe, en charge de défendre la démocratie, les droits humains et l'État de droit, sur les discriminations subies par les britoophones notamment par la suppression totale des émissions de langue bretonne des antennes de la radio et de la télévision publiques et, au mieux, à leur confinement sur les réseaux sociaux et internet contre la volonté des journalistes et animateurs britoophones eux-mêmes. Elle souligne aussi un manque de moyens pédagogiques en ligne et des difficultés accrues pour l'enseignement bilingue, malgré l'investissement des enseignants publics et les outils mis en place par le réseau immersif Diwan.

Ces difficultés supplémentaires interviennent dans un contexte déjà dégradé par la politique du ministère de l'Éducation nationale qui avec la réforme du lycée et du bac a gravement dévalorisé le statut des langues régionales au profit des langues de l'antiquité, contrairement aux déclarations du ministre Jean-Michel Blanquer, ce que confirme la chute des effectifs d'élèves choisissant cette option.

#### Pour une société démocratique respectueuse des droits humains fondamentaux

Symbole du refus de reconnaître la diversité culturelle et linguistique, en avril en plein confinement, la nouvelle opposition du procureur de la République de Saint-Brieuc au « ñ » d'un nouv-né prénommé Fañch à Pabu (22), que le maire a inscrit sur le registre d'état civil dans le respect de la langue et du droit des parents.

Depuis lors, alors qu'est dénoncée la verticalité du pouvoir à l'occasion de cette crise sanitaire, un courrier du Recteur d'académie du 20 avril réforme l'initiation à la langue bretonne mise en œuvre avec des salariés d'associations dans les écoles maternelles, élémentaires et primaires du Finistère, sans concertation aucune avec ses partenaires que sont le Département, les communes et le Conseil régional de Bretagne.

Cet autoritarisme et ce mépris d'une autre époque vis à vis des élus du peuple ne sont pas tolérables dans une société démocratique de citoyens libres, éclairés et responsables. Kevre Breizh attend une véritable concertation pour le droit des jeunes Bretonnes et Bretons à leurs langues et cultures autochtones en ce 21ème siècle conformément aux orientations de l'UNESCO pour la défense de la diversité culturelle aussi importante que la biodiversité et pour le respect des droits humains fondamentaux.